

UR SELL A-DOST WAR ILIZ LOKMARIA KEMPER



VILLES
& PAYS
D'ART &
D'HISTOIRE

TAOLENN

4 MERKOÙ

Un toullad bloazioù pouezus evit pourmen en amzer

6 ER PENN KENTAÑ E OA...

Un tolpad-kêrioù galian-ha-roman

➤➤➤ Teknikoù evit sevel tiez

Deroù ar gristeniezh

8 ABATI SANTEZ VARIA

Diazezadur ar manati

➤➤➤ Un diell prizius

Ur savadur romanek lorc'hus

➤➤➤ Daoust petra eo ar vein-se ?

➤➤➤ Ur sell ouzh an danzouar

➤➤➤ Ha merzhet ho peus ?

16 PRIOLDI LOKMARIA

E dalc'h Sant-Suleg-ar-C'hoad

➤➤➤ Priolez hag itron

Treuzfurmadurioù ar prioldi

➤➤➤ Devezh al leanezed

➤➤➤ Kumuniezh Lokmaria en XVIII^{vet} kantved

24 AN ILIZ-PARREZ

Chapel Lokmaria

➤➤➤ Ur batis rummataet

Reneveziñ an iliz

➤➤➤ Joseph Bigot pe adsevel ur batis romanek skouer

Ar c'hinkladur diabarzh

➤➤➤ Iliz ar feilhañserien

Golo

Ur gwel eus iliz ha prioldi Lokmaria diwar
al liorzh giz ar Grennamzer.

Amañ e-keñver

Ur gwel eus kloastr iliz Itron-Varia
Lokmaria.



MEUR KRONOLOGEL

UN TOULLAD BLOAZIOÙ POUEZUS EVIT POURMEN EN AMZER

A-RAOK KREIZ AN XI^{vet} KANTVED

Odiern, merc'h kont Kerne, e penn an abati. Savet an iliz romanek.

1120

Deuet ar manati da vezañ ur prioldi stag ouzh abati Sant-Sulegar-C'hoad, e-kichen Roazhon.

A-RAOK 1022

Donezon madoù ha douaroù da gumuniezh relijiel Santez Varia.

E-PAD AN DISPAC'H

Ac'hubet savadurioù ar prioldi gant an arme.

1855

Fiziet ar savadurioù e fabrik chapel Lokmaria

1815

Adimplijet ul lodenn eus an iliz evit al lidoù relijiel, evel « chapel sikour ».

13 A VIZ KERZU 1793

Drastet an iliz.

1857

Deuet chapel Lokmaria da vezañ iliz-parrez.

27 MEZHEVEN 1862

Lakaet an iliz war roll ar monumantoù istorel.

1871

Adsavet ar penn-chantele romanek.

1858

Deroù raktres Joseph Bigot tisavour an eskopti, evit reneveziñ an iliz.

2022

Lidet mil bloaz diazezadur an iliz.



1172

Diskarget prioldi Lokmaria eus kement pennwir da baeañ ha roet ar gwir dezhañ da reiñ justis war an dud hag an douaroù stag ouzh ar prioldi.

1124

Meneget an anv Lokmaria evit ar wech kentañ.

FIN AR XIV^{VET} KANTVED

Echu gant ar gumuniezh paotred er manati.

1792

Skarzhet al leanezed kuit.

1746

Savet ti ar briolez.

1669

Ar c'haridenn dufev er c'hloastr.

1600-1614 HA GOUDE-SE 1634-1637

Marie de Bourgneuf aet da briolez. Treuzfurmadurioù en iliz.

1646

Adsavet batisoù ar prioldi.

26 A VIZ MEZHEVEN 1963

Enskrivet ar c'hloastr war roll ar monumantoù istorel

26 A VIZ KERZU 1969

Enskrivet talbenn ha toennoù ar prioldi war roll ar monumantoù istorel.

1999

Labourioù evit reneveziñ toenn an iliz.

2019-2021

Renevezet framm an doenn ha toennoù an adkostezioù.

2006

Sontadurioù arkeologel er c'hloastr.

ER PENN KENTAÑ

EOA...



1. Kartenn al lec'hiennoù galian-ha-roman savet gant Jean-Paul Le Bihan.

LE BIHAN J.-P., VILLARD J.-F., Archéologie de Quimper, matériaux pour servir l'Histoire. Tome 2, Au temps de l'empire romain, 2012.

... UN TOLPAD KÊRIOÙ GALIAN-HA-ROMAN

Gant ar furchadegoù arkeologel kaset da benn e karter Lokmaria omp bet gouest da c'houzout hiroc'h diwar-benn kavell Kemper. E beg an aber, er c'hentañ roudour war an Odet, e oa en em staliet ur gêr en Henamzer. Gant ar rouedad hentoù war zouar e veze gallet da-c'houde skignañ ar varc'hadourezh degaset dre aocherezh.

Ar roudoù koshañ eus kêrioù zo eus mare renad August (27 kent J.K. - 14 goude J.K.) ha lec'hiet ar pellañ diouzh ar stêr. Pa greskas kêr e voe savet savadurioù liammet ouzh ar porzh hag ar c'henwerzh tostoc'h-tost ouzh glannoù ar stêr, a voe atredet tamm-ha-tamm. Ouzh dorioù an iliz a vremañ e c'hall an atredoù sevel betek daou vetr tevder. En em astenn a rae kêr en tu-hont d'ar porzh, betek tor Menez Fruji, gant un takad annez hag

ar veredeg e Krec'h Maria. Ul lec'h gouestlet d'ar relijion zo war lein ar menez : adkavet eo bet aspadennoù un neved eus an Henamzer e Park ar Groaz, en Erge-Vihan.

E barr he brud e oa ar gêr galian-ha-roman en ^{II}vet kantved goude J.K. War a seblant e oa bet dilezet ar glannoù e-pad un toullad kantvedoù adalek ar ^{IV}e kantved rak gant ar furchadegoù n'eus bet kavet roud ebet eus annezioù e karter Lokmaria betek an ^{IX}vet kantved.

DEROÙ AR GRISTENIEZH

Roudoù kentañ ar gristeniezh e Lokmaria a gas ac'hanomp betek deroù ar Grennamzer. Goude ma voe dilezet ar gêr eus an Henamzer a-hed ar stêr e vefe staliet kentañ eskopti Kemper er ^{VI}vet kantved war gern Menez Fruji, a oa ul lec'h relijiel en Henamzer dija. N'eo ket puilh ar roudoù arkeologel estreget ur walenn arem, ur

groaz warni, hag ul laouer-vez kristen diskoachet e Menez Fruji.

Hervez ur vartezeadenn all e c'hallfe sez kentañ eskopti Kerne bezañ bet e Lokmaria, marteze aozet evel ur gumuniezh relijiel renet gant un abad. Er skridoù kozh e konter e vefe bet savet ur manati e lodenn gentañ ar ^{VI}vet kantved e Lokmaria. Gant Tudwal e vefe bet diazezet ? An abad kentañ e vefe bet ar sant-se, hag eñ eskob war un dro, evel ma oa ar boaz e Breizh d'ar c'houlz-se ?

Tost d'an Oded e oa ar manati-se, moarvat tro-dro d'ar vretell mont tre war an hent-tizh, da vont war-zu Pont-'n-Abad. Gouestlet e oa da Sant Kolomban, ur manac'h iwerzhonat marvet e 615, hag a vefe dilestret war aodoù Arvorig evit kristenaat Breizh.

Ur c'hilometr ac'hann, er su da Lokmaria, e kaver emañ Lanniron, a oa da eskopti Kerne betek an Dispac'h. E brezhoneg e talvez « lann » evit ur

peniti kozh, a-raok ar bloaz 1000. Amañ e vefe bet peniti Sant Heron.

Pell zo neuze ez eus eus ar relijion gristen er vro, hogen n'eus bet kavet roud ebet koshoc'h eget an ^{IX}vet kantved e-kichenik an iliz a vremañ. Kavet e oa bet ur vered dirak an iliz e 2007, gant bezioù hag a vefe eus an ^{IX}vet-^Xvet ha bloavezhioù kentañ an ^Xvet kantved. Merket e oa bet ar mareoù-se gant an emgannoù enep ar Vikinged ha dindan veli ar re-se goude-se, e dibenn an ^{IX}vet hag e deroù an ^Xvet kantved. Ar pennoù bras, relijiel hag all, o doa kuitaet Breizh. Goude ar maread skandinaviat-se, adalek ar bloavezhioù 950, e voe lañs adarre gant kresk ar boblañs ha gant an ekonomiezh e Breizh evel en Europa a-bezh.



1. Delwennigoù galian-ha-roman eus an doueez Gwener bet dizoloet e Rosmaria

Luc'hskeudenn gant Jean-Paul ar Bihan, Dielloù-kêr Kemper.

2. Ur skouer eus ur voger galian-ha-roman e mein bihan, bet dizoloet 1 straed ar Chaloni-Moreau e Lokmaria.
LE BIHAN J.-P., VILLARD J.-F., Archéologie de Quimper, matériaux pour servir l'Histoire. Tome 2, Au temps de l'empire romain, 2012.

TEKNIKOÙ EVIT SEVEL TIEZ

Implijet e oa bet dreist-holl mein bihan a-walc'h gant ar Romaned evit sevel o ziez e Lokmaria. Pri poazh a veze implijet ivez evit sevel an toennoù teol, pe evit pileroù an tommerezh dre gavioù-tommañ. Perzhioù boutin a weler etre moger an iliz eus ar Grennamzer hag ar mein bihan galian-ha-roman ha bez' ez eus darbodoù pri poazh er mañsonerezh ivez, diwar se e c'haller soñjal e oa bet adimplijet danvezioù eus an Henamzer.



ABATI SANTEZ VARIA

DIAEZADUR AR MANATI

An donezonoù kentañ

Savet e voe iliz Itron-Varia Lokmaria en ^{XI}^{vet} kantved evit bezañ lec'h azeuliñ an abati. Ar wech kentañ e oa bet meneget ar manati-mañ gouestlet d'ar Werc'hez Vari a oa war-dro 1060, e-barzh un akta hag a oa renablet ennañ an donezonoù profet gant tiegezh konted Kerne d'an ensavadurioù relijiel.

En o zouez e lenner en doa roet Benead, eskob ha kont Kerne, an aotre da douchañ da viken an drederenn eus leveoù iliz Gourelizon, a zo ur pemzek kilometr bennak eus Kemper. Graet e voe an donezon evit mad sanctæ Mariæ in aquilonia civitate, manati santez Varia staliet war al lec'h galian-ha-roman e Lokmaria. Gant an dedienn d'ar Werc'hez, an hini nemeti e Kerne e deroù an ^{XI}^{vet} kantved, ez eus un testeni eus un deoliezh nevez hag a oa o tont war wel.

En akta e lenner ivez e ro Benead « an douar a ya eus ar maen anvet Maen Tudi [war alezioù Lokmaria], betek ar groaz tost da Venez Fruji, hag ac'hann betek ar stivell anvet Pabi [tost ouzh ar pennospital] ha betek ar Stêr-Oded » d'ar manati. Tremen a rae ur brosesion, pe un droveni, dre al lec'hioù-se kement ha delc'her soñj eus an dachenn a oa e dalc'h ar manati, evel ma lenner war un diell eus ar ^{XVII}^{vet} kantved.

Marvet e vefe ar c'hont-escob Benead e 1022, gant-se e ouzer war-dro pevare e oa bet an donezonoù kentañ-se. E-pad ar maread viking e oa bet kemeret ar galloudoù politikel, soudardel ha relijiel gant tiegezhioù zo evito o-unan. Evel


tiegezh Kerne a oa meneget darn eus e izili er skrid eus an ^{XI}^{vet} kantved. Benead a oa kont hag eskob Kerne war un dro. Merc'h da eskob Gwened e oa e wreg. Daou vab o doa : Orskand, eskob Kerne (a oa bet kemeret e blas war ar gador eskob gant e vab, betek 1113), hag Alan Kenarzh, kont Kerne, gwaz Yudizh. O mab Hoel a yeas da dug Breizh e 1066 ; o merc'h Odiern a zeuas da vezañ abadez kentañ Lokmaria.

Ul lañs nevez gant ur manati maouezed

Alan Kenarzh en em gavas da-heul e dad Benead e penn kontelezh Kerne ha gant e wreg Yudizh e roas meur a gêr hag a zomani, ha milinoù-dour ivez, da vanati an Itron-Varia. Unan eus an donezonoù a oa evit o merc'h, Odiern, a reer abadez anezhi en akta. Ar skrid koshañ eo ma raed anv eus ur manati maouezed e Lokmaria. Anvioù germanek a oa gant al leanezed meneget en akta e-touez an testoù evit donezon diwezhañ ar c'hont Alan Kenarzh, rak gant an aotrouien vreton e voe lakaet merc'hed da zont eus manatioù diavaez evit adpoblañ ar c'houentoù e Breizh.



Marvet e vefe Alan Kenarzh e 1058 ha Yudizh e 1064, diwar se e ouzomp war-dro pevare e oa



UN DIELL PRIZIUS

Talvoudus-kenañ eo an diell-se ha panevetañ ne c'haller ket studiañ istor abati Lokmaria. Unan eus ar re goshañ eo e-touez ar re a zo miret en dielloù-departamant e Breizh. Ur barchenn vras eo, 52 cm war 29,5 cm, graet diwar kroc'hen dañvad pe gavr bet prientet evit delc'her liv-skrivañ. Ar skritur implijet eo al lizherennoù karolingat, a zo ront ha reoliek, hag aes-kenañ da lenn. Eus kreiz an ^{XI}^{vet} kantved eo an akta. Rouez eo an dornskridoù eus ar mare-se hag a zo deuet betek ennoomp.

Pañkartenn a vez graet eus ar seurt dielloù-se. Meur a akta zo warni, dispartiet gant pikoù-skej, enno renabl an donezonoù resevet gant ar manati digant tud eus tiegezh konted Kerne. Graet e oa bet evit delc'her soñj eus an donezonoù, kuit da goll anezho. Ouzhpenn gwareziñ ha suraat he madoù e oa, evit ar gumuniezh, ur mod da lakaat he liammoù gant ar pennoù bras war wel ha da zegas brud vat war hec'h anv.

en em staliet ar gumuniezh maouezed. Ar c'hont hag e wreg o doa roet douaroù hag ivez gwiriou aotrouniel da abati an Itron-Varia abalamour da reiñ ul lañs nevez dezhi. Liammet e oa ar youl-se ouzh ar c'hresk hag al lusk nevez a oa gant ar relijion d'ar mare-se er C'hornôg, evel na oa bet biskoazh.

Gant ur manac'h bourgognat anvet Raoul Glaber e oa bet deskrivet ar pezh a zegouezhas e-tro ar bloavezh mil en Europa a-bezh war dachenn ar c'hrouiñ en disavouriezh : « Gwelet e veze, er bed a-bezh pe dost, tud oc'h adsevel an ilizoù ; daoust ma ne oa ket ezhomm d'en ober evit an darn vrasañ anezho a oa savet evel ma oa dleet, e oa ur gwir heligentañ hag a vroude pep kumuniezh kristen da gaout unan kaeroc'h eget hini an amezeien. Evel pa vefe bet ar bed e-unan oc'h en em hejañ evit lemel e gozhni ha gwiskañ, un tamm e pep lec'h, ur sae wenn a ilizoù. » ¹

¹ Raoul Glaber, Cinq livres d'histoires depuis l'an 900 après l'Incarnation jusqu'en l'an 1044, ^{XI}^{vet} kantved.

E Breizh ivez en em gavas al lusk evit sevel traoù nevez. E-kerzh lodenn gentañ an ^{XI}^{vet} kantved e voe adsavet abatioù Landevenneg, ar Groaz Santel e Kemperle, hini Lokentaz hag hini Sant-Meven. Hag abati Lokmaria ivez.

1. Gwerenn-livet iliz-veur Sant Kaourintin e Kemper, bae niv. 4 :
ar c'hont Alan Kenarzh a ginnig maketenn ur chapel romanek d'ar Werc'hez.
Luc'hskeudenn gant Bernard Galéron.

2. Parchenn diazevadur abati Lokmaria.
Dielloù-departamant an Il-ha-Gwilen, 24H110_2.

3. Moger an nev romanek zo savet e mein bihan.

4. Kemper - Iliz Lokmaria - an absidenn.
Kartenn-bost gzh, Dielloù-kêr Kemper, 29Fi167.

5. Absidiolenn norzh ha tourell-skalier.

6. Tres iliz Lokmaria gant Joseph Bigot.
Dielloù-departamant, 29 T 046.



3



4



5

UR SAVADUR ROMANEK LORC'HUS

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : kit e-maez an iliz, war blasenn Bérardier, evit kaout ur sell hollek ouzh ar savadur.*

Savet e oa bet an iliz en ^{XI}^{vet} kantved da-heul an donezonoù a-berzh ar gontelezh da abati an Itron-Varia. Graet o deus ar saverien gant un tresad kroaz latin hengounel, gant un nev hag ar penn-chantele d'he heul er reter a ya d'ober bann ar groaz a-serzh, tra ma'z ar groazenn d'ober an divvrec'h.

Ur skouer vat eus an arz romanek eo stumm an iliz, gant blokadoù distag an eil re diouzh ar re all ha lakaet kichen-ha-kichen. Evit ar prenestroù, n'eus nemet re vihan war hantergelc'h. Harpet eo mogerioù an nev gant an adkosteziou a zo soutenet gant pileroù-harp plasat en ur mod dizingal.

An nev hag an adkosteziou

Moger an adkostez en norzh, a c'haller gwelet eus ar blasenn Bérardier, zo bet savet gant mein-ben 8 cm uhelder ha 12 cm ledander, urzhiet a renkennadoù reoliek. Mein adimplijet e c'hallfent bezañ. Savet e oa bet ar mogerioù hag an harpelloù war ar memes tro, e-kerzh eil kard an ^{XI}^{vet} kantved. An toulloù-chafod a oa bet implijet evit delc'her ar chafodoù pa voe savet an iliz, a c'haller gwelet bepred en diavaez anezhi, a-steud rik.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : kit war-raok betek straed ar chaloni Moreau evit sellet ouzh ar groazenn hag ar penniliz.*

Ar groazenn


Graet eo ar groazenn e mein-ben a vent etre. Disheñvel eo ar mod m'eo stummet an nev hag ar groazenn, rak-se e oa bet soñjet e-pad pell e oa bet savet an iliz e-pad daou varead, met diwar ar studioù a zo bet graet e soñjer bremañ e oa bet graet pep tra en un taol. En tenn-kroaz ez eus un tour-iliz hag a oa pep a dri frenestr war e dalbennoù en e stumm orin, ar pezh a rae dezhañ bezañ heñvel a-walc'h ouzh un tour-letern marteze. Moarvat e oa bet uhelaet an tour en ^{XII}^{vet} kantved rak ar prenestroù gevellet (rannet etre daou gant ur golonennig) a oa bet savet a-raok 1200.

Ar penn-chantele

Adaozet e oa bet ar penn-chantele diwezhatoc'h, diwar an tres orin. Gwelet a reer un absidenn greiz, gant un absidiolenn (ur chapelig vihan en hantergelc'h) a bep tu dezhi hag a zo chapelioù hag a sko war ar groazenn. Mogerioù an absidiolenn norzh, ha n'eo ket bet treuzfurmet, zo savet gant mein bihan ha krenn a bep eil. Splannoc'h eo an efed kinklañ-se abalamour m'eo liesliv ar mein a gaver ivez e diabarzh ar savadur, war pileroù an nev. Ur viñs zo en dourell harp ouzh ar voger en norzh.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : a-raok mont e-barzh an iliz, chomit a-sav dirak an talbenn er c'hornôg.*

TRES ILIZ LOKMARIA





1

1. War al luc'hskeudenn gozh-mañ ez eus ur vandenn sklaeroc'h ouzh moger an nev hag a c'hall dont diwar ar fed ma oa bet izelaet toennoù an adkosteziou en XIX^{vet} kantved, evit distankañ ar prenestrou uhel. Cheñchet e oa bet toennoù an adkosteziou en XVII^{vet} kantved ha diwar se e oa bet stanket ul lodenn eus prenestrou an nev.

Kartenn-bost kozh. Dielloù-kêr Kemper, 29 Fi 166.

DAOUST PETRA EO AR VEIN-SE ?

C'hwec'h seurt reier disheñvel zo bet implijet evit sevel an iliz. Emain e kerentiad ar reier ploudonek a zo deuet diwar magma strinkennek e deun an douar (greunit, pegmatit, granodiorit), hag eus hini ar reier metamorfek a zeu diwar treuzfurmadur reier hag a oa anezho dija (gneis, ortogneis, amfibolit). Dont a ra an holl vein eus an trowardroioù tostañ d'ar savadur pe eus glannoù an Oded, war-hed un dek kilometr bennak en traoñ da Lokmaria.

Ar reier ploudonek

Ar roc'h implijet ar muiañ eo ar greunit a reer « Pluguen » anezhañ, a gaver koulz e-barzh mogerioù an XI^{vet} kantved hag er re a oa bet adsavet en XIX^{vet} kantved. Unvan a-walc'h eo e stumm, gant liv gris ha pailhourennoù mika munut.

Ar reier metamorfek

Graet eo mogerioù an adkosteziou hag an absidiolenn en norzh gant gneis hag ortogneis. Diwar ur roc'h ouelezennek kozh e teu ar gneis, a ya gwiskadoù sklaer ha teñval a-bep-eil d'ober anezhañ.


Kavet ez eus bet ur bloc'had amfibolit e moger an absidiolenn norzh. Glas-gwer teñval eo ha munut ha stank eo ar c'hreunenn.

Danvezioù all

E-barzh ar mogerioù mein e weler brikennoù amañ pe ahont. Hervez an istorourien ez int traoù pri pozh roman adimplijet. E lec'h all e Penn-ar-Bed e kaver ivez brikennoù e diabarzh ar mogerioù, en iliz Sant Pêr Plougêr a zo tre e-kichen ar gêr roman gozh. Implijet e oant bet evit lakaat an azezoù maen a-rez.

Graet e oa bet ar juntoù en XI^{vet} kantved gant traezh ront o greun, tennet e-barzh stêrioù. Gwelet a reer ivez kregin a bep seurt, e-se e ouzer e oa bet graet gant traezh bet tennet e-barzh glannoù an Oded, ur stêr-aod hag a zo dindan levezon al lanvioù.

KARTENN EUS KEMPER HAG AN TROWARDROIOÙ



**Granodiorit
eus Kemper**



**Greunit greun tanav
«eus Pluguen»**



**Ortogneis
«Nizon-Kemperle»**



Gneis



Amfibolit



An talbenn pennañ

Kreñvaet eo an talbenn gant peder harpell, e-giz ma veze graet peurvuiañ d'ar mare romanek. Lakaet int war ar memes tu gant mogerioù kreiz an nev ha re an adkosteziou. Ar porched, an nor hag ivez ar prenestr giz c'hotek flammek, zo eus dibenn ar ^{XV}^{vet} kantved pe deroù ar ^{XV}^{vet} kantved. E 1964 e oa bet savet delwenn ar Werc'hez.

A-gleiz d'ar porched e oa un nor hag a zo stouvet hiziv an deiz, gant ur maen ledan en hanter eus an uhelder ha merket Prigent Vinoc 1723 warnañ. En ^{XIX}^{vet} kantved e veze renket ar pomp eneptan el lodenn-mañ eus an iliz.

🕒 *E-kerzh ho kweladen : kit e-barzh an iliz ha sellit ouzh an nev.*

An nev

Ment bras an iliz, ouzhpenn 40 m hirder en holl, a glot gant hini ur savadur evit priñsed, da lavaret eo santual konted Kerne. Gant ar mod pizh m'eo savet e weler ivez e felle dezho sevel ur batis lorc'hus. E diabarzh an nev, pe e trofec'h war-zu an talbenn kornôg pe e sellfed ouzh ar pileroù ez eo harp ar gwaregoù-bolz outo, e weler ez eus bet implijet mein-ben dreist-holl. Savet eo ar pileroù gant mein granit, hervez ur aozadur dezhañ e-unan, gant teir azezen ledan hag un azezen strishoc'h a-bep-eil. Dont a ra ar mod-se da ziduañ an daoulagad eus an Henamzer, ar mare ma veze graet mein a-seurt-se. Gwelet e vez ivez an dave d'an disavouriezh henamzerel tro-dro d'an nor evit dont e-barzh, lec'h ma'z eus div volz hantergelc'hiek, hag a oa un nor-dalbenn doubl en orin. Biskoazh n'eus bet bolz vaen ebet evit an nev. Moarvat e c'halled gwelet ar framm e stumm orin an iliz ha marteze e oa bet savet ur volz

koad lieskorneg en ^{XII}^{vet} kantved, da lavaret eo lambrusk tachet war ar pezhioù a ya d'ober ar framm. Pozet e oa bet ar volz a zo bremañ, lambrusk warni, en ^{XIX}^{vet} kantved. Lakaet e oa bet ar gwelteñvoù (treustoù a-blaen eus framm an doenn, staliet a-dreuz ar savadur) a-blom d'ar pileroù, ar pezh a zegas ul lusk gant treuziadoù reoliek (takadoù bevennet gant daou zalc'her a-blom). Degaset e oa bet ar sell-se gant al labourioù reneveziñ en ^{XIX}^{vet} kantved rak d'ar mare romanek ne oa ket eus treuziadoù c'hoazh. Kement-se zo kaoz n'emañ ket prenestroù-meur en adkosteziou war ar memes tu gant ar gwaregoù-bolz meur, nag a-steud gant prenestoù uhel an nev.

An adkosteziou

Goloet oa bet an adkosteziou gant lambrusk en ^{XIX}^{vet} kantved. Betek ar mare-se e oa framm an doenn war wel. Kemmet eo bet meur a wech. Er ^{XVII}^{vet} kantved, evel er savadurioù romanek all e Breizh, e voe kresket naou an doenn en adkosteziou, evit lakaat mein-skjent warni moarvat, e-lec'h teoloù, plom pe daroù greunit., rak un doenn mein-skjent gwan he naou a c'hall lezel an dour da dremen. Da neuze e voe stanket ul lodenn eus prenestroù-meur an nev. Pa voe adkempennet an iliz en ^{XIX}^{vet} kantved e voe rentet o naou orinel d'an toennoù en adkosteziou ha diwar se distanket ar prenestroù. Daoust m'eo diaes merañ an dour-glav eo bet dalc'het an doenn mein-skjent betek-henn, abalamour d'an naou da chom evel m'emañ.



1. Ur gwel eus ar porched gotek.
2. An nev romanek.
3. Bolz lambrusket an nev.
4. Brec'h norzh ar groazenn.

UR SELL OUZH AN DANZOUAR

E 1991, e-kerzh al labourioù kaset da benn dindan ar c'hloastr, e oa bet dizoloet ul lodenn eus ar mogerioù diazez en adkostezioù. Ur skouer vat eo eus an diazezoù romanek, savet war atredoù eus ar mare galian-ha-roman. Hed-ha-hed ar voger e kaver botizi, ur metr donder dezho, ha ledanoc'h int eget ar voger, 10 cm ouzhpenn a bep tu. Ganto e c'haller lakaat ar garg da vezañ harp ouzh un dachenn ledanoc'h, abalamour da ingalañ gwelloc'h pouez ar savadur.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : kit betek ar groazenn..*

Ar groazenn

E mein-ben penn-da-benn eo savet ar groazenn, koulz e diavaez hag e diabarzh an iliz. Pezhioù bolzioù-gwareg dall a zeu da solutaat ar mogerioù ha degas ur stumm bosek dezho war un dro. E-krec'h ar c'holonnennoù ez eus togennoù delioù kizellet warno.

Disheñvel-mik diouzh doare plaen an nev eo an doare m'eo kinklet al lodenn-mañ. E-pad pell e oa bet soñjet e oa bet savet an iliz e daou reuziad an eil da-heul egile, gant ur cheñchamant stil etre an daou. Gouzout a ouzer bremañ e oa bet savet ar groazenn hag an nev en ^{XI}^{vet} kantved, hogen fichet kaeroc'h e oa bet ar c'horn sakr, dezhañ da vezañ dreist ar peurrest eus ar savadur.

Un diforc'hañ e-keñver al liderezh stag ouzh al lec'h eo a zo amañ ha neket abalamour ma vefe bet daou reuziad labourioù.


Un tour karrez zo war lein kroazigell ar groazenn. Ouzh ar mogerioù e weler roudoù digoroù war hantergelc'h, hag a zo stouvet bremañ. Diwar se e soñjer e oa un tour letern eno hag a leze ar gouloù da zont tre e-barzh ar santual. Nemet ha digor e vefe bet ar prenestroù-meur war an diabarzh, heñvel ouzh ur gaoued vaen dantelezet, a-istribilh ouzh ar groazigell.

HA MERZHET HO PEUS ?

War unan eus an togennoù e weler un dremm. Heñvel a-walc'h eo ar mod m'eo taolennet an dudenn-se, he divrec'h hag he divhar stilekaet, ouzh an enlivadurioù a veze kavet e darn eus al levrioù prizioù er Grennamzer Uhel.

A-us d'ar bolzioù reter ha su e teu daou benn merc'hed war wel. Unan anezho zo ganti ur c'hoef gant ur boned sonn e vord rizennet, un « toured », hag un tamm lien da stardañ hec'h elgezh, un algennig, hag a veze lakaet alies en ^{XIII}^{vet} kantved. Unan eus ar pileroù e kroazigell ar groazenn n'eo ket evel ar re all. Gwisket eo bet, da lavaret eo ez eus lakaet ur golo kelc'hiek en-dro dezhañ, dezhañ da vezañ stabiloc'h, abalamour ma oa erru distabil moarvat. Ar pilier postek-se n'eo ket un dourell-viñs. E diabarzh ar voger dev en norzh d'ar c'heur emañ c'hoazh ar viñs romanek da bignat en tour-iliz.

PRIOUL LOKMARIA



E DALC'H SANT-SULEG-AR-C'HOAD

E 1120 e profas Konan III, dug Breizh ha mab-bihan Alan Kenarzh, manati an Itron-Varia e Kemper d'an abati Itron-Varia an Neizh Moualc'h, e Sant-Suleg-ar-C'hoad, tost da Roazhon. Un nebeud bloavezhioù diwezhatoc'h, e 1124, e voe kadarnaet an donezon-se gant Roperzh, eskob Kerne, en un diell ma voe graet evit ar wech kentañ gant an anv Lokmaria. Dont a ra Lok eus al latin locus hag a dalvez « lec'h sakr » (amañ eo gouestlet d'ar Werc'hez Vari), ha « manati » dre astenn-ster.

Nevez-savet e oa an abati e Sant-Suleg-ar-C'hoad, e 1117, e-se e voe kreñvaet gant an donezon-se. Reiñ a rae bod d'ur gumuniezh maouezed ha d'ur gumuniezh paotred, evel hini Lokmaria lec'h ma oa div gumuniezh abaoe ar mare ma oa Odiern an abadez en XI^{vet} kantved d'an nebeutañ, betek dibenn ar XIV^{vet} kantved. Da-heul an donezon a-berzh an duged ez eas statud Lokmaria eus abati da brioldi, da lavaret eo e oa e dalc'h an abati-vamm.

Er grennamzer e veze renet ar manati gant ur priol hag ur briolez. Ar priol a rae war-dro merañ an arc'hant hag an darempredoù gant an diavaez. Graet e veze « rektor » anezhañ ha karget e oa, e-mesk kefridioù all, da bourvezañ al leanezed ha da zalc'her ar savadurioù e stad vat. Evit ar briolez, karget e oa-hi eus buhez diabarzh ar gouent. Implijet e veze an iliz, un iliz-prioldi diwar neuze ha neket un iliz-abati ken, evit an

ofisoù niverus gant ar gumuniezh relijiel hag ivez evit ar barrezianiz. Evit kemer perzh en oferenoù en em stalie ar re-mañ e-barzh an nev met dispartiet e oant diouzh al leaned memes tra.

En-tu-hont d'e berzh speredel e oa ar prioldi un domani bras, gant perc'hennajoù pell-mat diouzh Lokmaria. Evel e pep aotrouniezh e oa ur c'houldri, ur vilin hag ur forn voutin hag a oa ret da dud ar c'hornad implijout a-bouez paeañ gwirioù. Etre an XII^{vet} hag ar XV^{vet} kantved e oa tost-tre ar vilin d'ar gouent. Goude-se e voe savet ur vilin nevez war riblenn all an Oded. E-kreiz an XVIII^{vet} kantved e voe gwerzhzet d'ar feilhañserien a implije anezhi evit malañ pigmantoù, diwar se an anv « milin al livioù ».

An daroù-bez

🕒 E-kerzh ho kweladenn : kit war-zu an adkostez norzh.

Lakaet ez eus bet daroù-bez ouzh moger an adkostez norzh. Betek 1883 e oant a-rez al leur en hevelep adkostez. Kinklet eo ar vein-se gant gant tresadennoù engravet dre rizennoù.

War an dar gentañ pa'z eer tre en iliz ez eo taolennet an den marv ur sae gentañ hag ur boned war e benn, digor e zaoulagad, juntet e zaouarn evit pediñ hag ur c'hi e-harz e dreid. A-us d'an den ez eus ur wareg teirranngelc'hiek, warni un togell gant krochedoù struj, hag ur groaz a-us a bep tu ez eus aeled daoulinet oc'h



hejañ ezañsoueroù. Un enskrivadur a ra tro an dar, evel ur vevenn.

Evit an eil dar-vez e vefe hini Alan Penlu, bet priol e Lokmaria e deroù ar ^{XV}^{vet} kantved. A bep tu d'an den marv eo bet taolennet e ardamezioù, ur skoed tri fenn warnañ.

War ar maen diwezhañ e tiviner tres an den marv dindan un arkitektouriezh c'hotek ha pinakloù en-dro dezhañ.

 *E-kerzh ho kweladenn : kit bremañ betek brec'h ar groazenn er su.*

Harpet ez eus unan eus an daroù-bez ouzh ur piler hag a-gleiz, war al leur, eo enskrivet war ar maen anv an den marv. Marie de Bourgneuf eo, bet priolez e Lokmaria eus 1600 da 1614 hag eus 1634 da 1637. Da gentañ e oa bet he delwenn gourvezet hag an enskrivadur e kroazigell ar groazenn, etre an daou biler er su. War ar maen-bez, ma'z eus merket e oa marvet e 1656, eo taolennet ar briolez war hanter-vos dindan un daez stummet-kaer, dilhad leanez ganti, juntet he daouarn, harp he fenn ouzh ur goubenner, damserr he daoulagad da c'horthoz ar varn diwezhañ.




1. Ur barchenn eus 1475
« Servijout a ra da ziskouez
emañ prioldi Lokmaria e
dalc'h abati Sant-Suleg ».

Dielloù-departamant
an Il-ha-Gwilen, 24H111.

2. Un dar-vez.

**3. Dar-vez Marie de
Bourgneuf.**



PRIOLEZ HAG ITRON

Da vare ar renad kozh e oa aotrouniezh Lokmaria dindan beli ar briolez. Roet e voe dezhi al lesanv a « briolez prioldi dugel ha roueel Lokmaria Vras hag ar C'hilioù ». Gwir he doa da reiñ justis uhel, krenn hag izel.

An enor o doa ar briolez hag he leanezed da glevet an oferenn e-barzh ar c'hañsell, da lavaret eo a-dreñv ar gloued da glozañ ar c'heur, ha gallout a raent bezañ douaret eno. Resev a raent ar profoù a veze graet er c'hañsell hag er c'heur, evit reiñ anezho d'ar fabrik abalamour da ingalañ an iliz.

Anvet e veze kure Lokmaria gant ar briolez. Paeet e veze gwirioù ha deogoù a bep seurt dezhi e Pouldregad, Plonevez-ar-Faou, Tregon hag Eliant (gwinizh, segal, kerc'h, deñved, yer, vioù ha kement zo), hag ivez digant an dud a veze oc'h eurediñ e Lokmaria, ar varc'hadourien besked e Lokmaria, ar bigi hag ar barkoù a zilestre e porzh Kemper. Ouzhpenn implijout ar forn hag ar vilin voutin e oa ret d'an annezidi reiñ bod d'al leanezed e-pad ar mareoù brezel. Ret e oa d'ar briolez lakaat oferennoù ha pediñ, asambles gant he leanezed, evit peoc'h eneoù an duged kozh hag ar re a zeue war o lerc'h.²

² D'après Jules Henriot, Notre-Dame de Locmaria Quimper, Essai d'histoire religieuse locale, ul levrig tennet diwar ar sizhun relijiel, 1903.

TREUZFURMADURIOÙ AR PRIOLDI

E 1600, pa voe anvet Marie de Bourgneuf da briolez d'he 23 bloaz, e oa ur « marevezh ar skorn-bihan » o paouez echuiñ er vro hag en doa degaset diazamantoù evit al labour-douar, war un dro gant ur barr epidemiezh gant ar vosenn. Edo ar vourc'h hag ar prioldi oc'h adsevel goude bezañ bet ac'hubet gant bagadoù ar Marichal d'Aumont e-kerzh brezelioù ar C'hevre, endra ma oa bet Gi Eder Fontanella oc'h ober e reuz hag o laerezh war ar maezioù : diasur e oa an traoù neuze, ar pezh na oa ket re vat evit dastum an tailhoù ha reiñ lañs d'an ekonomiezh.

Ur pezh cheñchamant a voe e buhez kouent Lokmaria pa voe Marie de Bourgneuf en he fenn. Evel m'eo engravet war he dar-vez e-barzh an iliz e oa-hi merc'h, c'hoar, ha moereb da brezidanted Breujoù Breizh. He familh, nevez-noblet d'ar c'houlz-se, a oa kreñv an arc'hant ganti, e-se he doa sikouret moarvat kas al labourioù bras da benn e Lokmaria, evel reneveziñ toennoù an adkosteziou, da skouer.

Adreizhet, kemmet ha kresket e voe ar prioldi gant Marie de Bourgneuf. Stag e oa ar cheñchamantoù-se ouzh al lañs nevez a oa gant ar vuhez relijiel da-heul Kuzul Trento. Er XVII^{vet} kantved e oa en em staliet meur a gumuniezh leanezed (ursulinezed, kordennerezed, sistersianezed ha kement zo) e Kemper, er c'hornôg d'ar gêr gloz, a veze graet « Douar ar c'houentoù » anezhañ.



E Lokmaria e voe strishaet sklotur al leanezed, da lavaret eo an dachenn evito hepken : difennet e oa d'al leanezed gwelet ar pezh a oa en diavaez d'ar gouent ha bezañ gwelet. E-barzh an iliz e voe savet ur penn-chantele lieskornek, sklêrijennet gant prenestroù-meur gotek, e plas an absidenn romanek. E plas an absidiolenn su e voe savet ur sal bevarc'hostezek hag a c'halle al leanezed ac'hano klevet an oferennoù kuit da vezañ gwelet gant ar barrezianiz. Dispartiet e oa keur al leanezed diouzh ar santual gant ur gael koad pe metal hag a veze serret gant stalafioù koad pe gant ur rideoz pa ne veze ket ar seurezed eno. Bez' ez eus eus talbenn su keur al leanezed c'hoazh, gant un dalenn dric'hornek hag ul lomber kelc'hiek a-us an nor. Gallout a reer gwelet anezhañ pa vezer el liorz er su d'an iliz.

📍 *E-kerzh ho kweladenn : kit d'ar c'hloastr ha d'al liorz dre dor an adkostez er su.*

DEVEZH AL LEANEZED

Heuliet e veze reolenn sant Benead gant leanezed ar prioldi. Sevel a raent etre un eur ha teir eur vintin hervez mareoù ar bloaz. En em gavout a rae al leanezed en iliz ar gouent evit dibunañ ar matinezoù hag ur rummad salmoù. Goude-se e lennent ar bibl ha levrioù deol betek mare al laodez, ha pedennoù da-heul neuze. Kerkent ha tarzhan-deiz e stagent gant al labour, a veze ehanet d'an eurioù liderezh evit ar bedenn a-stroll. Debriñ a raent o merenn war-dro kreisteiz. Labourat a raent goude betek ar gousperoù. Padout a rae ar c'hwec'h ofis pemdez etre teir ha peder eur, ha kemend-all evit ar bedenn hag al lectio divina (lennadenn santel). Eizh pe nav eur a veze gouestlet bemdez d'ar predoù ha d'ar c'housed. Lusket e veze an devezhoù gant ar c'hleier a sone an eurioù hag a bede al leanezed d'en em vodañ evit ar pedennoù hag ar predoù. Chomet ez eus ur c'hloc'h kozh, eus ar bloaz 1784, e tour-iliz Itron Varia Lokmaria.

1. Siell Reunea-Frañseza Marigoù, unan eus priolezed Lokmaria Vras, etre 1727 ha 1755.

Dielloù-departamant an Il-ha-Gwilen, 24H111

2. An absidenn lieskornek he frenestroù-meur gotek, bet uhelaet er XVII^{vet} kantved.

Treset gant Joseph Bigot, 20 a viz mae 1867. Mediaoueg ar glad hag al luc'hskeudenniñ, G/82/29/2010-006881.

3. Ur gwel war ar prioldi hag ar c'hloastr.

4. An enskrivadur war vez Marie de Bourgneuf.





1. Relegoù ar c'hloastr romanek.

2. Sant-Pêr, harp ouzh ar Werc'hez Vari, a-us ar gwaregoù-bolz romanek.

RELEGOÙ MEIN

Er Grennamzer e kustumed sevel batisoù ar manatioù en-dro d'ar c'hloastr : sal ar chabistr, ar sal-debriñ, ar gegin, ar selier, an oaled kumun, ar sal-gousket. Evit prioldi Lokmaria avat n'ouzer ket penaos e oa renket al lodennoù-se er Grennamzer.

War an tu kleiz, pa'z eer e-maez an iliz dre an nor er su, e weler gwaregoù-bolz hag a gonter da relegoù sal ar chabistr eus an XII^{vet} kantved. Dav eo empennañ e oa leur garidoù ar c'hloastr kozh 40 cm izeloc'h eget al leur a zo bremañ. War ar garidoù-se e tigare an daou brenestr meur romanek eus sal ar chabistr Er sal-se en em vode al leanezed evit komz eus a bep seurt traoù liammet ouzh buhez ar gumuniezh goude bezañ lennet ur chabistr eus reolenn sant Benead, diwar se anv ar sal hec'h-unan.

War an tu kleiz, pa'z eer e-maez an iliz dre an nor er su, e weler gwaregoù-bolz hag a gonter da relegoù sal ar chabistr eus an XII^{vet} kantved. Dav eo empennañ e oa leur garidoù ar c'hloastr kozh 40 cm izeloc'h eget al leur a zo bremañ. War ar garidoù-se e tigare an daou brenestr meur romanek eus sal ar chabistr Er sal-se en em vode al leanezed evit komz eus a bep seurt traoù liammet ouzh buhez ar gumuniezh goude bezañ lennet ur chabistr eus reolenn sant Benead, diwar se anv ar sal hec'h-unan.

Dalc'het e voe da gempenn al lec'hioù reizh war-lerc'h prioldi Marie de Bourgneuf. Savet e voe ar batis kentañ e 1646, war unan all hag a oa eno a-raok moarvat. Astennet e voe ar prioldi goude-se er mervent d'an iliz, ar pezh na oa ket tre diouzh ar patrom klasel ma veze savet an traoù-se, gant ar sal-debriñ, ar sal-gousket ha salioù all ar gouent en-dro d'ar c'hloastr.

N'eo ket ar c'hloastr ur pevarc'hostezeg klok. Savet e oa bet an div c'haridenn e 1669 e tufev, a zo ur seurt mein-raz tener hag a vez tennet e Traoñ al Liger. Savet e oa bet ar c'hloastr gant arc'hant argouroù Catherine Blot, a oa danvez leanez er gouent. Rak adalek 1664 e c'halle ar prioldi degemer danvez leanezed. Diwar se e voe kresket peadra ar gouent ha neuze e voe gallet sevel ar gazel a-skouer gant ar batis kentañ.

>>> En ur zont e-maez an iliz e fin ho pizit e c'halloc'h gweladenniñ porzh ar prioldi.

🕒 E-kerzh ho kweladenn : kit adarre en iliz dre an nor a zigor war ar c'hloastr.







KUMUNIEZH LOKMARIA EN XVIII^{vet} KANTVED

Betek ar XVII^{vet} kantved, e Kerne, ne oa nemet manati Lokmaria a oa merc'hed ennañ. Seizh seurez hag hanter-kant a oa bet o lojañ eno etre 1688 ha 1792. Cheñch a rae an niver anezho a-hed ar c'hantved : naontek e 1700, unnek etre 1730 ha 1740, div warn-ugent e 1790. E-kerzh an tregont vloaz diwezhañ en em gavas muioc'h a leanezed nevez er gouent : c'hwec'h pa ne oa bet nemet teir er bloavezhioù 1720. En XVIII^{vet} kantved e oa 26 vloaz well-wazh al leanezed nevez en em gave e kouent Lokmaria. 16 vloaz e oa an hini yaouankañ oc'h erruout ha 43 an hini goshañ. Ganet e oa an darn vrasañ anezho e famihou nobl. E 1790 e oa an holl leanezed keur eus an noblañs, tra ma oa ganet an holl leanezed-lik e familhoù partapl, war-bouez unan. Karget e veze ar seurezed-lik d'ober war-dro al labourioù-dorn hag an aferioù sekulier er gouent. Ober a raent war-dro an danvez leanezed ivez moarvat.

Al lodenn vrasañ eus ar pañsionerezed a oa ganet e tiegezhioù nobl ha darn anezho a oa kar d'ar seurezed. Evel Anne-Julienne Richer de Champripault, c'hoar-gaer ha moereb d'an div briolez diwezhañ e Lokmaria. Ganet e oant o-div, Reunea-Frañseza Marigoù ha Mari-Anna ar Ruz a Gerzavid, en tiegezh Marigoù a oa unan eus tiegezhioù pennañ en takad deuet da vezañ Penn-ar-Bed hiziv an deiz.



- 1. Tres Lokmaria e 1857.**
Dielloù-departamant
Penn-ar-Bed, 1V185.
- 2. Ur raktres evit adsevel
an iliz romanek e
Lokmaria, gant Joseph
Bigot en 1858.**
Mediaoueg ar glad hag
al luc'hskeudenniñ,
G/82/29/2010-005974.
- 3. Reneveziñ iliz Lokmaria
e 2020-2021.**

CHAPEL LOKMARIA

Da-heul nozvezh ar 4 a viz Eost 1789, pa voe torret ar privilajoù, e voe echu gant aotrouniezh Lokmaria Vras. D'an 11 a viz Ebrel 1791 ne oa ket ur barrez ken ha skarzhet e voe ar re ziwezhañ eus leanezed sant Benead alese er bloaz goude. D'an 13 a viz Kerzu 1793, an deiz war-lerc'h ma oa bet drastet iliz-veur Kemper, e voe graet kemend-all gant iliz Lokmaria.

E-pad an Dispac'h e voe fiziet batisoù ar manati hag ul lodenn eus an iliz e ministrerezh ar brezel. Dispartiet e voe brec'h ar groazenn diouzh ar peurrest eus an iliz gant speurennoù abalamour d'ober, gant keur kozh al leanezed, evit baraerezh hag etrepaouez evit ar c'heuneud da dommañ ar forn. Toullet e voe talbenn ar groazenn evit aesaat ar mont-dont etrezek ar batisoù all lec'h ma veze stoket bevañs ar soudarded. Er prioldi e oa burevioù ha kazarnioù.

Adalek 1815 e voe adimplijet ul lodenn eus an iliz evit al lidoù relijiel, evel « chapel sikour » evit tud ar c'harter. Ugent vloaz goude e teuas Prosper Mérimée, enseller meur ar monumantoù istorel, da weladenniñ ar batis da-geñver un droiad e Breizh evit renabliñ ar monumantoù da vezañ gwarezet. Komz a reas eus an iliz romanek evel-henn : « Diaes eo anaout he stumm orin e-touez ar cheñchamantoù a zo bet graet dezhi. » ³


E stad fall e oa. Da neuze e voe roet bec'h gant fabrik ar chapel (ar vererien a zo karget da zastum arc'hant evit delc'her batisoù hag arrebeuri ar barrez e stad vat) evit paeañ al labourioù dresañ, gouestlañ an iliz en he fezh d'al lidoù adarre ha lakaat enskrivañ anezhi war roll ar monumantoù

istorel. E 1855 e voe adwerzhet an iliz a-bezh d'ar fabrik, hag ivez un dachenn da sevel ar presbital da zont. Dont a reas chapel Lokmaria da vezañ iliz-parrez e 1857. Krog e oa an dud da soñjal ober labourioù adal ma voe gouestlet an iliz en he fezh adarre d'ar relijion. Lañset e voe ar studiadennoù a-raok ma vefe enskrivet iliz an Itron-Varia war roll ar monumantoù istorel, a voe savet d'ar 27 a viz Mezheven 1862.

³ Prosper Mérimée, Notes d'un voyage dans l'ouest de la France, 1836.

UR BATIS RUMMATAET

Krouet e oa bet bodad-labour ar monumantoù istorel e 1837 evit saveteiñ ar glad e Frañs. En em lakaat a reas neuze da renabliñ ar « monumantoù kozh » ha da « rummata anezho hervez o zalvoudegezh » en ur verkañ pegement a arc'hant a vo ezhomm evit « miret anezho pe adlakaat anezho e stad vat ». Diwar neuze e voe graet gant ar ger « rummataet » da lavaret ez eus bet lakaet ur batis war roll ar monumantoù da vezañ dalc'het kempenn ha renevezet, ha termenet ar mod ma vez rannet an arc'hant roet gant ar Stad evit saveteiñ anezho diouzh ar broriezh. P'emañ an iliz Itron-Varia Lokmaria war roll ar monumantoù istorel ez eo stag atav ouzh ur statud gwir a-ziforc'h abalamour dezhi da vezañ gwarezet, dalc'het e stad vat, renevezet ha lakaet war wel. Ar rummata eo al live uhelañ e-keñver gwareziñ ar glad savet.



RENEVEZIÑ AN ILIZ

Goulennet e voe gant Joseph Bigot reneveziñ an iliz. Labourat a reas hennezh e Lokmaria evel tisavour an eskopti, a oa ur vicher da vare ar C'honkordad (1801-1905) evit ober war-dro al labourioù war ar savadurioù perc'hennet gant an eskopti. E 1858 e kinnigas Joseph Bigot ur raktres evit reneveziñ an iliz a-bezh diouzh ar c'hiz romanek. Daoust ma ne veze ket aprouet e vod da zegas kalz cheñchamantoù war ar batis gant melestradurezh ar monumantoù istorel met ec'h adsavas da vat un iliz romanek skouer, war-bouez un toullad traoù lezet a-gostez.

E 1868 e voe distrujet ar c'heur gotek. Da-heul furchadegoù e voe dizoloet diazez an absidenn romanek, ar pezh a lakaas Joseph Bigot da cheñch e draoù. Er bloavezhioù 1870 e voe echuet ar penn-chantele nevezromanek, gant un absidenn gant ur volz revr-forn (ur volz hag a ya un hanter-goupolenn, pe ur c'hard-boul, d'ober anezhi), hag adsavet un absidiolenn er c'hreisteiz. Adkavet e voe he naou orinel gant an doenn en adkosteziou ha distanket prenestroù-meur an nev. Renevezet e voe brec'hioù ar groazenn gant prenestroù hantergelc'hiet. Lakaet e voe selioù ha bolzoù lambrusket er groazenn, en adkosteziou hag en nev.

JOSEPH BIGOT PE ADSEVEL UR BATIS ROMANEK SKOUEUR

A-raok al labourioù e Lokmaria n'en doa ket labourer Joseph Bigot nemeur war savadurioù romanek. Nevez e oa ar soñj e-unan peogwir e voe gwelet ar ger « roman » evit ar wech kentañ e 1818 e skridoù an den gouizieek Charles de Gerville.

E Lokmaria e felle da Joseph Bigot lemel kement tra ha ne oa ket romanek, kement tra savet goude an ^{XII}^{vet} kantved.

Er raktres savet gantañ e 1858 edo an tisavour e-sell da doiñ ar batis a-bezh gant teol hag a glote mat gant an nebeut a naou a ginnige evit an tour ha gant an doenn izelaet evit an adkosteziou. Miret e vefe ar porched gotek met evit adkempenn ar peurrest eus an talbenn e vefe lamet ar werenneg eus ar ^{XV}^{vet} kantved evit lakaat tri frenestr war hantergelc'h en he flas, war skouer ar re a zo en abati Daoulaz.

Gant ar cheñchamantoù krenn-ha-krenn-se ha n'int ket bet graet penn-da-benn, e voe distreset an iliz da vat e-keñver ar mod ma oa a-raok, anez doujañ he neuz istorel. Aze e weler un doare da glask kaout ur stil unvan, evel ma rae Viollet-le-Duc, anez labourat eveltañ diwar un enklask istorel hag arkeologel a-raok reneveziñ tra pe dra.

Adalek 1881 e voe renet al labourioù gant Paul Gout. Diwar neuze e veze lakaet ur pennarkitektour ar monumantoù istorel da evezhiañ al labourioù d'ober. Anv a oa da zresañ da gentañ-penn, kentoc'h eget adsevel.

E-kerzh ar c'hantved goude e voe labourer war al lodennoù a zo e krec'h ar batis. E 2019-2021 e voe graet al labourioù reneveziñ diwezhañ, evit dresañ toenn an adkosteziou. Ret eo delc'her kempenn an iliz gant reuziadoù labour ingal abalamour da wareziñ anezhi en amzer-da-zont.



AR C'HINKLADUR DIABARZH

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : sellit ouzh brec'h ar groazenn en hanternoz.*

Ar groazenn liesliv

E brec'h ar groazenn en hanternoz ez eus ur c'hinkladur gant delioù ha falsaparaill e maen-benerezh, livet e ruz war foñs gwenn, evel ma veze graet er mare romanek. Adsavet e oa bet an diabarzh-se diouzh ar c'hiz romanek gant Joseph Bigot, evel juntoù pileroù ar groazenn uslinennet gant ul lezenn okr ruz. En iliz Daoulaz, bet renevezet gant ar memes tisavour hag er memes bloavezhioù, e kaver kinkladurioù heñvel a-walc'h.

Ittron-Varia Lokmaria

Hervez kont er vro e vefe tremenet delwenn Ittron-Varia Lokmaria hebiou an Dispac'h dizomaj ha profet goude-se d'an iliz gant un den eus an tiegezh De la Hubaudière, feilhañserien e Kemper. Pa voe renevezet an oberenn-se e 2014-2015 e voe gwelet e oa un delwenn blastr fardet en ^{XIX}^{vet} kantved, warni kinkladurioù alaouret rikamanet, ha neket unan vaen evel ma soñjed betek-henn.

Sant Pêr

Koshoc'h eo delwenn koad liesliv sant Pêr. Taolennet eo an abostol gwisket evel ar pab, un diarenn war e benn, alc'hwez Rouantelezh an Neñvoù gantañ en e zorn. Sur a-walc'h e oa ur groaz en e zorn dehoù. Ouzhpenn an arouezioù-se ez anavezer diazezer an Iliz gant ar pezh a zo skrivet e brezhoneg war ar sichenn.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : sellit bremañ ouzh ar roudoù kinkladurioù a weler an absidenn c'hoazh.*

Ar c'hinkladur livet er c'heur

Er c'heur, dindan ur gwiskad liv nevesoc'h, ez eus chomet ur c'hinkladur diouzh giz ar Grennamzer lakaet gant ar barrez e 1904. En traoñ ez eus mezheraj livet e trell-lagad. A-us, ur frizenn livet hag a ra tro an absidenn. E krec'h ez eus tourioù (evit degas da soñj eus Letanioù ar Werc'hez) ha flourdiliz (arouez glanded ar Werc'hez) strewet war ar mogerioù hag ar gwaregadurioù livet e gwer sklaer. A-us rizenn an absidenn ez eus bet livet gerioù tennet eus Letanioù ar Werc'hez e latin : Regina sine labe originali concepta, ora pro nobis (Roueez koñsevet dinamm, pedit evidomp). Gant ar revr-forn, stered livet a-strew warnañ war ur foñs sklaer, e tegaser da soñj eus bolz an neñv. Gouestlet eo kinkladurioù ar c'heur d'ar Werc'hez Vari, hervez dogm ar Grouidigezh Dinamm kement ha bezañ resisoc'h (un doktrin ma pouezer war ar fed e oa dinamm Maria a bec'hed a-dal he c'hrouidigezh).

Goloet e oa bet ar c'hinkladurioù livet-se gant ur gwisponadur er bloavezhioù 1950-60, ur mare ma oa entanet an dud gant an arz romanek, ar pezh a reas dezhe lemel an traoù bet lakaet diwezhatoc'h ha klask adkavout ar monumantoù en o stumm orinel diginkloc'h. Diwar ar memes tro-spered e voe tennet hent ar groaz hag ar gador-sarmon a oa bet savet gant feilhañserien eus Lokmaria en ^{XIX}^{vet} kantved.

ILIZ AR FEILHAÑSERIEN

E fin ar ^{XVII}^{vet} kantved edo al leanezed e prioldi Lokmaria o klask ur farder kornioù-butun pri, traoù implijet stank hag a veze lakaet da zont eus Holland betek-henn. Lakaat a rejont brudañ an afer e Frañs gant sikour o c'hongregadur. Neuze e kuitas Jean-Baptiste Bousquet Bro-Brovañs



lec'h ma oa ganet evit dont da chom da Lokmaria e 1699. Eno e labouras evit seurezed ar prioldi. E vab, Pierre Bousquet, a savas ar feilhañserezh kentañ war blasenn ar Stivell e Lokmaria, e 1708. E-giz-se e komañsas istor bras ar feilhañserezh e Kemper a voe merket neuз ar c'harter ganti. Dont a reas iliz Lokmaria da vezañ hini ar feilhañserien, diwar se ar pezhioù feilhañs a gaver enni.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : war mogerioù an adkosteziou.*

Hent ar groaz

Savet e oa bet hent ar groaz gant ar vichererezh De la Hubaudière e Lokmaria e 1860. Lakaet eo war roll ar monumantoù istorel. Livet e oa bet ar plakennoù feilhañs, warno senennoù eus ar Basion e kamaïennoù glas-kobalt, diwar skouer tresadennoù gant Josef von Führich, un arzour rakromantel aostrian. Livet eo an arsavioù kentañ en arlvioù sklaer, gant taolioù barr-livañ skañv. Mont a ra al liv glas war deñvalaat bep ma'z eer gant hent ar groaz, betek bezañ glas-du en daouzekvet arsav, pa varv Jezuz war ar groaz.

Sterniet e oant bet e pri poazh anamailhet, warno arouezioù ar Basion a-vos (ar gurunenn spern, ar skourjez, an Dremm Santel, tachoù, ostilhoù munuzerezh) ha traoù liammet ouzh ar mor (pesked, kresteneged, un eor) hag a zo stag ouzh an hengoun kristen ha war un dro ouzh buhez ar vro-mañ troet war ar mor, hag ouzh ar gumuniezh pesketaerien e Lokmaria. War unan eus ar plakennoù, war an tu a-dreñv, eo merket anvioù an dud o deus kemeret perzh evit sevel hent ar groaz. E-pad ur mare e oa bet tennet an arsavioù e-maez an iliz ; adlakaet int bet goude

bezañ bet renevezet gant an arzourez Marjatta Taburet e 1992.

🕒 *E-kerzh ho kweladen : e brec'h ar groazenn er c'hreisteiz.*

Delwenn sant Anton

Ganti eo bet kinklet ivez delwenn Sant Anton Padova, bet kizellet gant Jean-Claude Taburet. Taolennet eo sant Anton gwisket gant ur saevanac'h diouzh giz ar Frañsezidi. Emañ o tougen ar Mabig Jezuz, evit degas da soñj eus un dra degouezhet en e vuhez : un aotrou hag en doa roet bod dezhañ, a voe souezhet, en ur dremen hebiou kambr ar sant, gant ar sklêrijenn a oa o tont e-maez anezhi. Broudet gant ar guriusted e sellas dre frailhoù an nor ha neuze e welas Anton a oa o telc'her ar Mabig Jezuz, e zremm o skediñ, etre e zivrec'h. Sant Anton eo patrom ar feilhañserien rak hervez kont en defe graet « burzhud ar gwer brevet », da lavaret eo adsavet en defe traoù gwer hag a oa bet drailhet.

1. War ar gartenn-bost-mañ eus deroù an XX^{vet} kantved e weler ar c'hinkladur livet er c'heur.

Gwelet a reer ivez hent ar groaz hag ar gador-sarmon feilhañs.

Dielloù-kêr Kemper, 29 Fi 171.

2. E brec'h ar groazenn en norzh ez eus chomet ur c'hinkladur diouzh ar Grennamzer mod nevez, graet pa oa bet renevezet an iliz en XIX^{vet} kantved.

3. Delwennoù Sant Pêr hag ar Werc'hez-Vari, bet renevezet.

4. Unan eus arsavioù hent ar groaz e feilhañs.

5. Sant Anton, patrom ar feilhañserien.



1



2

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : e brec'h su ar groazenn emañ an ograoù eus an ^{XIX}^{vet} kantved.*

An ograoù Heyer

E meur a bazenn e oa bet lakaet sevel an ograoù adalek 1850 gant Ti-departamant ar re sot e Kemper, evit ober vad d'ar glañvourien gant ar sonerezh. Gant labourerien ar bredospital e oa bet savet ar gorzenneg e koad sapin ha koad kistin. Diwar goulenn ar rener e oa bet savet ar benvegoù gant an oberer ograoù Jules Heyer, a orin eus Silezia, e Polonia a vremañ, hag o chom e Kemper abaoe 1847. Er bloavezhioù 1990 en doa divizet an ospital profañ an ograoù d'ar gumun evit ma vefent renevezet ha staliet en iliz Lokmaria. E 2007 e oant bet advontet eno. Bremañ emaint war roll ar monumantoù istorel.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : e foñs an nev ez eus ur C'hrist war e groaz lakaet uhel war un treust a enor.*

Ar C'hrist war e groaz

War an treustoù a enor e kaver ur C'hrist boureviet peurvuiañ, gant ar Werc'hez ha Sant Yann en-dro dezhañ. Amañ, avat, n'eus bet lakaet warnañ nemet un delwenn e koad livet eus ar C'hrist war e groaz. Ur sae ledan zo gantañ, padal ez eo gant ur bagnenn e vez diskouezet peurliesañ. Awenet eo an doare taolenniñ-mañ gant Santo Volto de Lucca, ur grusifi hag a vije bet degaset eus Jeruzalem da Lucca en ^{VIII}^{vet} kantved e-bourzh ur vag hep gouel na roeñv.

Ar C'hrist zo gantañ ar sae limestra hir hag ar gurunenn-spern lakaet warnañ gant ar soudarded evit dismegañsiñ « roue ar Yuzevien » a-raok ma pignfe war Menez Kalvar. E dreid a

bouez war ur voul-douar. Ur c'hizelladur kozh e c'hallfe bezañ, degaset eus lec'h all, peotramant un eilad eus un delwenn eus ar ^{XVII}^{vet} kantved hag a weler en iliz ar Groaz Santel e Kemperle, hag a vefe bet urzhiet en ^{XIX}^{vet} kantved gant Joseph Bigot evit mont war an treust a enor.

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : en adkosteiz su e weler delwenn vaen Santez Katell Aleksandria.*

Santez Katell Aleksandria

Gant ar rod, an ostilh eo bet boureviet gantañ, e c'haller anavezout Santez Katell Aleksandria. Dont a ra an delwenn-mañ, savet e greunit er ^{XV}^{vet} kantved, eus an ospital Santez-Katell kozh, lec'h m'emañ ar prefeti hiziv an deiz. Profet e oa bet e deroù an ^{XX}^{vet} kantved gant Charles Chaussepied, embreger labourioù evit ar prefeti, hag arkitektour ar monumantoù istorel karget eus iliz Lokmaria da neuze.



🕒 *E-kerzh ho kweladenn : a-raok mont e-maez an iliz, sellit en tu dehoù ouzh delwenn ar Werc'hez he Mabig Jezuz, a-us ar maen-font.*

Ar Werc'hez he Mabig Jezuz

En ^{XIX}^{vet} kantved e oa bet savet an delwenn koad livet-mañ. Ar Mabig Jezuz zo un orb gantañ en e zorn kleiz, da lavaret eo ur voul-douar warni ur groaz. Kement-mañ a ziskouez emañ mestr war ar bed. Ar Werc'hez zo ur gurunenn lili ganti war he fenn, hag astenn a ra ur blokad rezin gant he dorn dehoù. Kement-mañ zo un arouez eus ar Basion da zont (ar gwinn eo gwad ar C'hrist).

🕒 *E-kerzh ho kweladenn : ur wech e-maez an iliz, kit betek porzh ar prioldi, war an tu kleiz.*

Porzh ar prioldi

Al leanezed ha novisezed a gave bod e porzh ar prioldi er savadurioù e stumm un L. Eus tu ar reter eo skrivet ar bloaz 1646 ouzh tal an ti, a-us ur skoed-ardamez – hini Marie de Bourgneuf, marteze. En treuziadoù kreiz ez eus ur skalier harzell-war-harzell. Kinklet eo an nor gant un dalenn dric'hornek torr ha gant podoù-flamm.

D'an 8 a viz Here 1664 e voe sinet un emglev nevez etre prioldi Lokmaria hag abati Sant-Suleg, a oa mestr warnañ. Betek-henn ne veze nemet un dek bennak a seurezed leet, da lavaret eo seurezed o doa graet o leoù. Diwar neuze e oa prioldi Lokmaria ur gwir leandi lec'h m'en em gave leanezed a bep seurt : re leet, re goñvers, ha re novis. Droed en doa da zegemer ur gumuniezh 25 seurez-keur ha 5 seurez koñvers, ha novisezed ouzhpenn-se. Pañsionerezed all a veve ivez er gouent, eus an noblañs evit ar braz

anezho : merc'hed yaouank deuet da gaout un deskadurezh diouzh o renk, ha reoù goshoc'h degemeret betek o c'hozhni diwezhañ, evit doare. Ar pañsionerezed-se o doa kambroù gant pep a oaled.

Evit lojañ muioc'h a leanezed e oa bet graet ur savadur ouzhpenn er su d'ar porzh. Paeet e voe gant argouroù unan eus al leanezed, Janed Kergoed, merc'h da brezidant ar prezidial. Frank eo an estaj kentañ : eno e oa ar sal-debriñ, kredapl. En estajoù uhelañ ez eus un trepas a-hed an talbenn norzh, eus tu ar porzh, evit mont d'ar c'hambroù, d'ar ranndioù ha d'ar c'housteklec'hioù. N'eus oaled ebet er gazel-se abalamour ma tlee leanezed Sant Benead diwall rak an aezamantoù.



**1. An ograoù
Heyer advontet
en iliz Lokmaria e
2007.**

**2. Ur C'hrist war e
groaz lakaet uhel
war un treust a
enor, e foñs an
nev.**

**3. Santez Katell
Aleksandria.**

**4. Ar Werc'hez he
Mabig Jezuz.**

5. Porzh ar prioldi.





A-live gant lomberioù an daou savadur e oa podoù-flamm, a bep tu d'an talennoù hantergelc'hiek. E kreiz-kêr Kemper e c'haller gwelet pezhioù seurt-se c'hoazh war meur a di eus ar memes mare. Rak n'eo ket awenet savouriezh ar prioldi gant ur patrom relijiel rik ; kentoc'h eo bet savet heñvel ouzh tiez an uhelidi a gêr.

Ar memes tra eo evit ti ar briolez, an hini tostañ d'an Oded, a zo merket ar bloaz 1746 warnañ. E zigorioù kromm a denn da re an osteloù prevez kemperat eus an XVIII^{vet} kantved. El lojamant-mañ e vevas div briolez ziwezhañ Lokmaria, Reunea-Frañseza Marigoù ha Mari-Anna ar Ruz a Gerzavid.

War-lerc'h an Dispac'h Bras e reas ar prioldi evit kazarn, betek 1945, ha staliet e voe lojeizoù ennañ goude-se. E 2007 e voe adkempennet ar savadurioù lec'h ma'z eus staliet bremañ ranndioù, obererezhioù ha salioù-diskouezadegoù.



1-2. Tres prioldi Lokmaria.

1821 - Dielloù-kêr Kemper

3-4-5. Munudoù eus ar prioldi.

« UNAN EUS AR SOUEZHUSAÑ TESTENIOÙ E BREIZH EUS AN ARKITEKTURIEZH ROMANEK EN XI^{VE}T KANTVED. »

Un divizadeg a-berzh kuzul-fabrik iliz-parrez Lokmaria e Kemper, d'an 29 a viz Mezheven 1880.

Emañ Kemper er rouedad vroadel Kêrioù ha Broioù arz hag istor.

An anvadur Kêrioù ha Broioù arz hag istor a vez roet gant ministrerezh ar Sevenadur, renerezh an Arkitektouriezh hag ar Glad, da strollegezhioù lec'hel a laka buhez en o glad. Gantañ e vezer sur ez eo barrek an heñcherien-prezegnerien hag a-feson an obererezhioù savet gant ar servijoù Kêr pe Bro arz hag istor. Hiziv an deiz, ur rouedad 202 a gêrioù hag a vroioù a ginnig he chemet deoc'h e Frañs a-bezh.

Nepell ac'hann

Tost da Gemper ez eus Kêrioù arz hag istor all : Brest, Konk-Kerne, Dinan, Dinazh, Felger, Gwenrann, an Oriant, Montroulez, Naoned, Pondi, Kemperle, Roazhon, Gwened ha Gwitreg.

Ti ar glad

5 straed ar Barzh Kadioù - 29000
Kemper secretariat.patrimoine@
quimper.bzh www.quimper.bzh - pgz.
02 98 95 52 48

Embannet gant ar servij Kêr arz hag istor e 2022, da-geñver mil bloaz an iliz.

Enklaskoù teuliaouiñ

Yannig D'Hervé, servij Kêr arz hag istor e ti-kêr Kemper.
Bez' e c'haller kaout roll ar mammennoù implijet diwar c'houlenn e Ti ar glad : levrlnnadur, weblennadur, pennadoù-kaoz gant arbennigourien, dielloù kozh.

Skridaozañ

Claire Montaigne, servij Kêr arz hag istor e ti-kêr Kemper, diwar ar sintezenn savet gant Yannig D'Hervé da danvez ar prezegnerioù a oa bet klevet da-geñver an devezh studi « Lokmaria, istor ur manati war ribloù an Oded », aozet d'an 2 a viz Mezheven 2022 gant Skol-veur Breizh-Izel

Kredadoù luc'hskeudenniñ

Ti-kêr Kemper, war-bouez menegoù kontrol.

Neuziañ grafek

Marc Delalleau diwar Des Signes studio Muchir Desclouds 2015.

Moullañ

Reprographie municipale de Quimper.

Dont da vezañ fan !

Bez' e c'hallit kavout Ti ar glad er rouedadoù sokial. Evel-se e vioc'h kelaouet pa vo abadennoù sevenadurel ha gweladennoù ! Ha na chomit ket etre daou soñj ma'z eo plijet hon obererezhioù deoc'h : skrivit un ali diwar hor penn e tripadvisor.



VILLE
DE QUIMPER



MINISTÈRE
DE LA CULTURE

Liberté
Égalité

